

(1)

Chanson  
Ar Chasseer

Allegri.

Var an toz gallec : C'est ici le bois de Cythère.

Arvizion em bez ar froudeñic  
Da vont d'ar chase glujuri,  
Hep trous, hep den hag hep qi ;  
Mar am bez poan, n'on get qizidic ;  
Pa beañ dec'h va faltazi :  
Hep trous, hep den hag hep qi .

(2)

An deiz all e paqis unanic,  
Ha c'hoas e voa divar c'hoari,  
Hep trous, hep den hag hep qi ;  
Me vizas mat var e asqellic,  
Hag e coezas var an irvi :  
Hep trous, hep den hag hep qi .

E c'haout a ris ec'haz eur c'hoadic,  
Hag hi eno gen dizoursi ;  
Hep trous, hep den hag hep qi .  
E surprer a ris gen houlc,  
M'am boe dioc'h-tu anezi :  
Hep trous, hep den hag hep qi .

Ha me da zestum va c'hlijanic,  
Contant, laouen ha dizoursi,  
Hep trous, hep den hag hep qi .  
Dridal a rêa va c'halonic,  
Pa zoublis da greg'i enni,  
Hep trous, hep den hag hep qi .

Selaouit brema eur g'entellc,  
Hag e tiscot en ur c'hoari,

Hep trouz, hep den hag hep qi.  
 Ar veyen da veza habilig,  
 Pa zeot da chasat glujuri:  
 Hep trouz, hep den hag hep qi.

(3)

Pa zeot d'ar chase, it sioulic,  
 Hag it ato pel diouc'h ho ti,  
 Hep trouz, hep den hag hep qi.  
 Diouc'h an trez e voufoc'h manifiq  
 Pelec'h e vezo glujuri:  
 Hep trouz, hep den hag hep qi.

Gemerit biryou Cupidonic,  
 Ha m'ar gouzoc'h mat o armi,  
 Hep trouz, hep den hag hep qi.  
 Caer o devezo beza spontic,  
 Sur oc'h da baca glujuri:  
 Hep trouz, hep den hag hep qi.

Ne c'hit james nemet d'ar parzic,  
 Quit e viot d'en em dèri,  
 Hep trouz, hep den hag hep qi.  
 Nebeut e chasot buanic  
 Na disac'h en em forbui:  
 Hep trouz, hep den hag hep qi.

(4)

Ar glujuri a zo eur bouedic  
 Friant, ha capabl d'o tenti,  
 Hep trouz, hep den hag hep qi.  
 Eur chascer, mar deo lipouzig,  
 A rafe ganto e c'hoari:  
 Hep trouz, hep den hag hep qi.